

[Entre les f<sup>os</sup> 12 et 13, il y a un feuillet de titre non chiffré.]

(f<sup>o</sup> 13)

Al Lesvramou (En Dreguer ewannik a Ligne).

Benos d'al loar a dar stêret  
Da kement tra zo var ar bed

he special d'al les-vamou  
Ma mallos a pedan gâto

Me voa eur kraoadur iaouank flam  
Pa varvas digen-he va mam.

Setu va zad o dimisi  
hag ho digas eul les-vam din.

Pa ves va zad hag hi eus tol o gounia  
Me ves a dreg ar or ho wela.

Pa ia ma les-vam emez ar ti  
distol va zad eun askorn din  
Evel ma ve tollet da eur c'hi. (1)

ha c'hoas e lavar din asta buhan  
gant aon na deufe va lesvam.

(f<sup>o</sup> 14)

Ma Pa deu va lesvam en ti  
e ra eur sel a gorn ourzin

hag e kommanç da maltraiti

Eun devez ehis var ar mes  
ha me arriout n' ti va magerez

(1). - Ce vers (3<sup>e</sup> de la str.) est ajouté, d'une encre plus noire.

14

Va Les-vam pa n'alle va goëlet  
 Dam sad e deveus lavarret

Yvonnik a Litur zo bed aman  
 En deus gourdrourzet ho Larian.

An dra ze dec'h me ne kredan ked  
 Yvonnik al Litur em c'har pepred.

Ma na goulennit ma kredi  
 goulennit gant ol dud ho ti.

Ma na kredit ket tud ho ti  
 Goullit gant ar potret merchossi.

Ol e tougent feiz fal testini  
 En aont zigobliza anezi.

(f° 15)

haq e varfe eur marc'h beb leo  
 Da Roazon sur me a ielo

hanon ma mab Yvonnik me roio

haq e varfe eur marc'h beb kamet  
 Da Roazon sur me renk monet

Nag ar justiq a vonjoure  
 he ti ar magerez pa n'arvue

Debonjour a joa oll en ti man  
 Yvonnik a litur pelec'h e man.

Yvonnik a litur zo en e vele  
 Koussket c'hoek var e goste.

Otro Doue petra meus me gret dam zad  
 pa he deut an archerien dam chere'hat.

C'houi a deus laket va lianen gentan  
 haq a lakeio an divean.

(f° 16)

Na na kaffen ket eur messenger  
Da c'has d'am paëron eul Liser

Chevalier Guen rer a nezan  
Kasset al liser man derzan

Debonjour a joa bars en ti man  
Chevalier quen pelec'h e man.

Chevalier quen ne man ket er ger.  
Zo ed gant euy tamik affer.

A c'han da varc'hoas deuis ket dar ger  
Me zo eul liser gane aman  
hag e zo pisset bras a kredan

Chevalier Guen pa deus klevet  
Gant ar vins dan traon zo diskenet.

Na ne voa ket evit e len  
Gant an dour o koueza deus e ben.

Ne voa ket evit e len mad  
Gant an dour o tond var e zann lagad.

hag e varfe eur marc'h beb leo  
Da roazon sur me a ielo

hag e varfe eur march beb kammet  
Da roazon sur me renk monet.

(f° 17)

Jannet Kquiduff 19<sup>x<sup>bre</sup></sup> 1850. (ne voar qen).

Mag ar chevalier Guen a bonjour  
en ti ar Provost bras pa n'arvie

(f° 18)

- Debonjour a joa bars en ti man  
Ar provost bras pelec'h e man

- Mar de ar Provost bras eo a klasket  
Kredit e houtan a Parlantet.

Laket va filior er valanç  
Me roi dec'h he poës a chevanz

A ma ne kavit mad va propos  
me roi dec'h poës va c'haros

e veronez a lavare  
Poerza he filior a ben ter quec'h

hag e roffe he poës aour klos beb vech  
Pe ma na kaffit mad ma propos  
me roi dec'h poës va c'haros  
Poës va no marc'h akipet klos.

Pa roffec'h dem poës ar ger man  
Yvonnik a litur n'ho po ket dianan.

Me a vel arvu va mageres  
hag hi o koerza beb kammet.

Didostait ta va mageres  
Va rin eur briata klorz dec'h c'hoas eur vech.

(f° 19)

C'houi o c'heus laket va lien kentan  
hag a lakei an diverzen.

Pelec'h man an tad dinatur  
lakat dibenna he kraouadur

17

Ar re all pa c'hoëmont ar jardrinou  
A zilam tout an droug louzou

eman a ra ar c'hontreul da se  
a lam pe vella deus he re.

Yvonnik al litur a lavare  
er vas huella ar skeul pa pigne.

— me a vel va mam en he c'hampchou  
Karget he halon a Joadiou.

haq hi he son gand he violans  
diski d'he bugale ar kadeans.

Ne voa ket he hir peurlavaret  
eur flam tan a kurun a zo deuet  
he lesvam a zo puluc'het.

—  
}

Jannet Kquiduff 16 Janv: 1851.